

Pedenn da Vari (Ar Geoded e Laruen) / Prière à Marie (Le Guiaudet en Lanrivain)

Ton : Santez Mari Mamm Doue... (variante locale)



1 – Itron Varia ar Geoded, selaouit, ni ho ped,
 Pedennoù ho pugale, ganeoc'h pell zo karet :
 Soñj-mat hoc'h eus, o Gwerc'hez, pa oamp c'hoazh bihanik,
 'C'h emp d'ho pediñ n'ho chapel joentet hon daouzornig.

*Notre Dame du Guiaudet, écoutez, nous vous en prions,
 Les prières de vos enfants, aimés de vous depuis longtemps.
 Vous vous [en] souvenez bien, ô Vierge, quand nous étions petits,
 Nous allions vous prier dans votre chapelle, nos petites mains jointes.*

2 – Abaoe hon eus ho karet eus a-greiz hon c'halon,
 Ho karout a raimp bepred, c'hwi hon Mamm, hon Itron ;
 Astennit d'ho pugale ho torn madelezhuz,
 Harpit hon sempladurezh, hon mirit da Jezuz.

*Depuis nous vous avons aimée du fond de nos cœurs,
 Nous vous aimerons toujours, vous, notre Mère, notre Dame.
 Tendez vers vos enfants votre main bienfaisante,
 Soutenez notre faiblesse, gardez-nous à Jésus.*

3 – Lusifer hon enebour, 'vel lion o yudal,
 Noz ha deiz 'ra dimp an dro, 'klask hon gounid d'ar fall :
 Hon c'huzhit en ho kalon, Itron vat ar Geoded ;
 Neuze, daoust d'e holl ardoù, kreñv ni vezo bepred.

*Lucifer notre ennemi, comme [un] lion rugissant,
 Nous entoure nuit et jour, cherchant à nous gagner au mal :
 Cachez-nous dans votre cœur, bonne Dame du Guiaudet ;
 Alors, malgré ses grimaces, nous serons toujours forts.*

4 – Bep bloaz, o ma Mamm dener, da zeiz kaer ho pardon,
 Ar sul kentañ a viz Mae me yelo gant kalon,
 Gant ur galon leun a feiz, da bediñ 'n ho chapel,
 Sur da gaout ma mennad drezoc'h, Gwerc'hez santel.

*Chaque année, ô ma tendre Mère, au beau jour de votre pardon,
 Le premier dimanche du mois de mai j'irai avec courage,
 Avec un cœur plein de foi, prier dans votre chapelle,
 Sûr d'être exaucé par vous, Vierge sainte.*

5 – Roit sikour dimp, o Mari, da dremen hon buhez
 E servij ho Mab Jezuz, en ho servij ivez ;
 Ha pa vo deut ar maro da falc'had hon deizioù,
 Itron Varia ar Geoded, grit ma 'z aimp d'an Neñvou !

*Aidez-nous, ô Marie, à passer notre vie
 Au service de votre Fils Jésus, à votre service aussi ;
 Et quand la mort sera venue faucher nos jours,
 Notre-Dame du Guiaudet, faites que nous allions au Ciel.*

NB : Ce cantique à N-D du Guiaudet fut publié dans le livre du chanoine Yves-Marie Le Men : **Sanctuaire et pèlerinage de Notre-Dame du Guiaudet en Lanrivain**, (1931) à la suite du cantique **Gwerz Itron Varia ar Geoded. / Complainte de Notre-Dame du Guiaudet**). Son auteur est également le recteur François Rolland. Le fait de prolonger un cantique de procession par un chant en forme de prière est assez fréquent dans les pardons. Ce chant est encore chanté de nos jours en complément du cantique principal du Guiaudet.

L'air est une variante locale de Santez Mari, Mamm Doue.